

# Keit ha ma vezo karantez

Son nevez ha kanet gant Glaoda COAT

## I

Ni a zo peurien n'hor beuz ty ebet  
Ni a vev dre an hent chou  
Hor c'hof vez goullou ar c'halon muntred  
Ni 'varv gant naoun hag gant 'riou  
Mez bez hor beuz hor pinvidiguezou  
Ar garantez a d'omm hor c'halonnou  
Ha d'all an oll vadou.

*(Dan diskan)*

## DISKAN

*Keit ha ma vezo karantez  
Dindan bolz an envou  
E vo kalz kaeroc'h ar vuez  
Tommoc'h hor c'halonnou  
Peger laouen eo gwelet  
An eol braz e para  
Peger dudiuz eo klevet  
An eostig e kana  
Dindan an env steredennet  
'Vezo kaeroc'h ar vuez  
Ma c'houezomp oll en em garet  
Gant joa ha karantez.*

## II

Pa vez deuet an noz poent mond da  
Ne jommonp ket da nec'hi [gousket  
Hag kenta pont goullou vezo kavet  
Ennez ha vezo om ty  
War ar vein ni a en em astenno  
Dizousi ha dinec'h neuze heno  
C'hoaz ni ha ganno.

*(Dan diskan)*

## III

Ni ne ellomp ket vel ar voundianet  
Fumi sigaretennou  
Ha blamour da ze e vezomp gwelet  
He fumi megoiou  
Hor iec'hed a jom mad ganeomb attao  
Goude beza dindan avel ha glao  
Ha ni gano attao.

*(Dan diskan)*

CHARLEZ MERCIER